



K
R
O
A

BREIZ

C'HOUEVRER 1949 10 PRIZ : 35 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Taol lagad war Groaz-Breiz (Y-F. ar Falc'hun)	Pajenn	1
Pajenn an Emzao Katolik (L. Bleunven)	—	2
Gouelioù ar Miz (An Tad)	—	3
Sant Loeiz-Vari a Vontfort (Y. Tranvouez)	—	4
Eur ger diwar benn Mikel an Nobletz (F. Gwegen)	—	5
Hanter Douzet (Yann-Bonig Lagad-eeun)	—	7
Gwechall e Kerwenn : ar Gounid Kerc'h (H. Greff)	—	11
A dreuz Breiz-Izel (V. S.)	—	13
Keleier	—	14
Tenzor an Dintin goz (Ab Sulio)	—	15
C'hoariou	—	16

Ar brezoneg er skol.

Ar c'hi o tougen pred e vestr (K. Mevel).

War golo an niverenn-man : Eur morutaer o vont Kuit diouz
Sant-Malo (Skeudenn Gilles Boinet, eus Hédé Ill-ha-Gwilen).

PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eun vloaz) **350** lur

Koumanant a zikour **500** lur

Koumanant a enor **800** lur

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva
da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, profes-
seur au **Grand Séminaire de Quimper (Finistère)**.

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da :
Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, **Plomelin**, par **Quimper**, (Fi-
nistère). **C. C. P. 1266.53 Rennes**, ha nann mui 21.802 evel araok.

AU MEUBLIER D'ART

Ep-Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains

FILET BLEU

BISCUITS FAMEUX

QUIMPER

CAMIONNAGE

DÉMÉNAGEMENTS

GARDE-MEUBLES

L. Tanguy

Quimper

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE

GAZO-BOIS

ACHATS — VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC

Siege Central : 34, Place des Lices, RENNES

Téléphone 55-75

TI ar GLOAN

9, Stræd ar C'higereziou, KEMPER

Gloanajou digemmesk

eus an oll ardameziou

Eti **SOUFREREZ KERNE**

E. BEGOT

13, Stræd Jean-Jaurès, KEMPER

Téléph. 9-33

E vez dreset adteuzet evit ar gwella goloù-kaoutchoug ar rodou

Gwerz a c'holoù a bep ment — labour val, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"

MODELES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ **Pierre PÊCHE**

ORFÈVREURIE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplôme
de l'Ecole
Nationale
d'Optique

DELBENIN

Diplôme
de l'Ecole
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kereon — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN **VITRAUX**

7, Rue Kergariou
QUIMPER

PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER FICELLES

Jean PAYAN Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133634

TAOL LAGAD war GROAZ-BREIZ

PA vez echu gantañ eun ero eus e bark, al labourer a zalc'h e jao a-zav eur pennadig, evit teurel eur zell war al labour graet, ha tenna anezañ kentel evit an amzer da zont.

Kroaz Breiz, en niverenn 8, he deus echuet he ero genta... N'hon eus ket barnet kerkent al labour, rak n'hor boa ket a c'hoant da zifounna niverenn Nedeleg : hirio eo aesoc'h deomp chom a zav!

Penaos barn al labour graet?

"War wellaat ez a bepred ar gele'hgelaouenn (Kroaz Breiz)... da bep hini d'ober bruderez en dro deziv..." Setu barnedigez eur gelaouenn all e brezoneg, Al Liamm, en he niverenn 11 (du-kerzu 1948). Hon hini eo ivez!

War wellaat : gouzout a reomp n'oa ket peurvat niverennou kenta Kroaz Breiz, ha n'eo ket c'hoaz zoken peurvat an niverennou, bremañ... Bez'ez eus kudennou hag a garfemp gwelout o kemer o flas er gelaouenn-mañ, graet evit ar bobl : evit c'hoaz n'omp ket deuet a-benn d'o lakaat enni, dre ziouer a bejjennou dreist-holl.

Kredi a reomp ivez omp bet loc'het buan eun tammig, ha dre-ze eo bet diaesoc'h aoza kompez an niverennou kenta; met mall bras oa loc'hat : diwezât edomp zoken, ha gwelloc'h hon eus kavet beza e buhez, en eur rei tro d'eur rebech bennak, eget gortoz pelloc'h... Ar rebechou a zo kouezet a-nebeudou, da vihana ar rebechou a-berz an dud a gar Breiz hag ar brezoneg, ar rebechou graet dre garantez. Ar re all avat, deuet eus ar gasoni, ne reomp ket kals a van ouz o c'hlevout :

"Evit plijout d'an holl
eo ret beza fur ha foll"!

Foll omp bet lakaet, hag ez omp lakaet c'hoaz : evit tud eus an diwarlerc'h, eo awalc'h c'hoaz, evel e 1900, beza breizat evit gounit an ano a foll. Met, evel ma lavarer e galleg : "Ar c'hi a harz, hag ar c'hañval a dremen"... Ha p'en devez bet ar c'hañval spered awalc'h evit kenderc'hel gant e hent, ne glev mui dizale ar c'hi, chomet a zav, stag ouz e jadenn!...

War wellaat... Youl hon eus da wellaat c'hoaz, evit dudi hon holl lennerien : dont a raimp a-benn, fisiañz hon eus da vihana, gant sikour hor c'henlabourerien a volentez vat, hag harp ar Vretoned.

Bennoz d'an holl skrivagnerien o deus labourer evit Kroaz Breiz! Dleet eo e vefe gouezet : holl skrivagnerien Kroaz Breiz a labourer evit "bennoz Doue". Abalamour da-ze hepken e chom ar gelaouenn ken marc'hat-mat e keñver prizioù an deiz hirio.

Holl ivez o deus bet an nerz kalon da drec'hi an teodadou brokus a c'helled gortoz er penn kenta : lakaet o deus o ano hag o brud etre skilfou tud ha ne glasket nemet gwaska... Er blijadur hag er vad a reont d'al lennerien e kavont o digoll er bed-mañ, da c'hortoz ma vo pinvidik awalc'h Kroaz Breiz evit gellout rei da bep labourer ar gopr en deus gwir da gaout.

Evit gwellaat hervez hor c'hoant, e vefe ret da Groaz Breiz kreski : 18 pajenn hepken bep miz, a zo berr da leuna, daoust m'int karget mat, re garget zoken, her gouzout a reomp... Met ne fell ket deomp ober eur gelaouenn skañv! Diwezatoc'h marteze e vo gellet karga ha sklaeraat... war bajennou niverusoc'h : bremañ e rankomp c'hoaz chom evel m'emaomp...

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

Goulenn a reomp c'hoaz harp an holl Vretoned, evit ma c'hounezo Kroaz Breiz tachenn e touez hor c'henvroiz : an dra-ze eo ar genlabourerez vrasa a c'hortozomp digant pep hini. Grit brud da Groaz Breiz! Klaskit koumananterien nevez! Roit ho niverennou da lenn en dro deoc'h... Gwelet a reot, gant souez, ez eus c'hoaz e kalon an darn vrasa eus hor c'henvroiz eun elfenn vev a garantez evit hor Breiz, ha pa c'houezer eun tammig warni, e krog an tan kerkent... C'houezit an tan-ze... Evit mad hor bro eo!

Kroaz Breiz a zegaso atao kelennadurez talyoudus ha levenez!

Y.-F. ar FALC'HUN.

PAJENN AN EMZAO KATOLIK NEUZE PEP LABOUR A LEZI

Eun aneval kurius eo an den : ne oar ket en em c'houarn! P'o devez an anevaled debret awalc'h, e chomont a zav. An den, heñ, a zehr hag a ev dreist muzul...

Ar memes tra eo evit al labour : tud zo ha ne ouezont ket ehana! Pegwir, emezo, e ranker debri bemdez, eo ret ive labourat bemdez. Hag o gweler sul-c'houel, evel da bemdez, daoubleget warzu an douar, rizennet o zal, enkrezet o spered.

Al labour hag a dlefe gounit dezo peadra da gaout eun tamm eurus bennak, a deu er c'hontrol, dre ma vez graet en eun doare direiz, da veza o bourreo.

Doue, hag en deus lakaet urz e pep tra, en deus lakaet ivez urz el labour : evel m'en deus rannet an amzer etre an deiz hag an noz, evelse en deus graet ive deizioù da labourat, hag eun devez da ehana. Falvezet eo bet gantañ o defe an dud eun devez vakañsou bep sizun, ma c'hellfent en deiz-se, sevel o fenn etrezek an neñv, rei diskuiz d'o c'horf, diduamant d'o spered.

Lezenn ar zul ne ordren ket deomp hepken implij an deiz-se e servij Doue hag an ene, met c'hoaz lezel pep labour a gostez.

Ma klevomp eus eun tu mouez Doue, e penn kenta ar bed, o c'houlenn digant an den labourat da c'hounit e vara ouz c'houezenn e dal, eus eun tu all, he c'hlevomp o lavaret dezañ ehana a grenn d'ar seisvet devez eus ar zizun : « Ne ri, en devez-se, tamm labour ebet, na te, na da vab, na da verc'h, na da vevel, na da vatez, na da loened, nak an estrañjour a zo en da di ».

Komzou sklaer, neketa?

[Al lezenn da labourat da bemdez, evel al lezenn da ehana da zul, a zo bet savet gant Doue war an hevelep renk. Graet int bet, an eil hag eben, evit brasa mad an dud, yec'hed o c'horf hag o ene.

Piou, gwelloc'h eget ar micherour-Doue, a anavez korf an den, piou gwelloc'h a oar petra en deus ezomp, ha betek pelec'h e c'hell mont?]

Lezenn ebet n'eo muioc'h hervez natur an den eget al lezenn da jom da ehana da zul : ar c'horf n'eo ket dir eo. Goude beza en em roet d'al labour tenn, netra gwelloc'h eget chom eur pennad a zav, evit gellout kregi adarre kalonekoc'h goudeze.

Gwaz-a-ze d'an nep a gred beza furoc'h eget e Groder : abred pe ziwezat e pao e follentez.

Ma kav korf an den pep tra da c'hounit o paouez al labour da zul, petra da lavaret eus e spered, e galon, e ene? Dizammnet ha dieubet diouz soursi al labour pemdeziek, ar re-mañ a c'hell en em drei a bez da gement a zo mat ha kaer.

Ar zul a deu da veza evelse eun devez disheñvel diouz an deizioù all, eun devez gouel, eun devez a joa...

Ha pegwir emañ an traou e giz-se, pegwir eo ken talyoudus d'an den chom hep labourat da zul, n'eus ket da veza souezet ma teu an Iliz da verka dezañ petra c'hell ober, en deiz-se, ha petra ne c'hell ket.

An Iliz a zo eur vamm ha ne glask nemet mad he bugale. Ma tifenn oute ober da zul al labourou a zegas skuizder d'o c'horf pe a gemer re o spered, n'eo nemet evit ma c'hellint gwelloc'h, en deiz-se, en em gomporti evel tud libr, evit ma c'hellint rapari o nerz, en em zével warzu Doue, tañva eun tamm levenez bennak.

Ar reolenn da heuilha eo, da zul, ober an nebeuta ma c'heller : en em gemeret eta da zadorn, evit lakaat urz e pep tra, hag echui e gwirionez ar zizun.

« Al labour sul, a lavare Person santel Arz, ne binvidika den ».

Ra vezo ar zul evidomp, lennerien ger, an devez a ra deomp soñjal er baradoz, el lec'h na vezo mui na labour, na stourm, na skuizder. A zul da zul, tostaomp ouz an diskuiz eurus m'eo aet Doue ennañ, goude labour ar grouidigez, diskuiz ha n'en devezo na mintin na noz!

L. BLEUNVEN

* Goueliou ar Miz *

2 C'HOUEVRER; MERCHER, GOUEL AR CHANDELOUR. —

“ C'houi, eme an den koz Simeon, hoc'h eus prepetet eur c'houlouenn evit sklerijenna ar poblou ”. Dre e brezegennou, dre e vuhez a-bez ha dre an Iliz en deus savet, Jezuz en deus roet sklerijenn d'ar bed, ha diskouezet dezañ hent ar zilvidigez. Met ret eo kenderc'hel gant e labour. Piou a vezo hirio sklerijenn ar bed, ma n'eo ket ar gristenien... dre o aliou, o oberou hag o skouerioù mat? Soñjomp ervat e kement-se, pa 'z aimp d'an Iliz da c'houel ar Chandeleur ha pa vezo eur c'houlouenn war elum ganeomp en hon dorn.

4 C'HOUEVRER, GWENER KENTA AR MIZ. — “ Hag ar zoudarded a zigoras e galon da Jezuz gant eun taol goaf ”... Kalon Hor Zalver a zo, evit an dud santel, eur repu a beoc'h... evit ar bec'hrien, eur repu a drugarez : lakomp enni hon holl fisiañz!

6 C'HOUEVRER, PEMPVET SUL GOUE AR ROUANED. — “ Aotrou, a c'houlennas ar zervijerien, ha n'hoc'h eus ket hadet greun mat en ho park? Perak 'ta ez eus draog e touez an ed? ”... Arabat beza souezet ma welomp, war an douar-mañ, an dud vat hag an dud fall mesk-ha-mesk. Eun deiz a zeuio ma vezint dispartiet mat an eil diouz egile : ar re vat a yelo d'ar Baradoz, ar re fall d'an ifern.

11 C'HOUEVRER, GWENER, GOUEL ITRON-VARIA-LOURD. — “ Ne brometan ket, eme ar Werc'hez da Vernadet, e vezot eurus er bed-mañ ; er Baradoz avat, e vezot eurusoc'h da viken ”... Santez Bernadet a zo bremañ gant ar Werc'hez, eurus da viken. Ra blijo ganti hor sikour da veva ive diouz kenteliou fur Itron Varia-Lourd, ha da gaout perz eun deiz e eurus d'ar Baradoz.

18 C'HOUEVRER, SUL AR SEIZ SIZUN (SEPTUAJEZIM). — “ Kit, c'houi ivez, d'am gwinienn ”... Gwinienn an Aotrou Doue eo an Iliz katolik, ha pep kristen a dle labourat enni evit gloar an Aotrou Doue, e vad e-unan ha mad an eneou. Daoust ha labourat mat a reomp? Ha kemer a reomp poan evit Doue? Ar seiz sulvez a deu hor c'has etrezek ar Bason : hor pedi a reont d'en em unani gant poaniou Hor Zalver evit silvidigez ar bed.

17 C'HOUEVRER, YAOU, GOUEL SANT KIREG, ABAD. — An den santel-mañ en deus skignet ar feiz kristen e Bro Leon (Plouvian, Plabenneg, Landerne, Kastell-Paol) hag e Bro Dreger (Lokireg). Eun devez ma kavas e Kastell-Paol eur gemaderezh o wriad da zul, e c'hour-

drouzas anezi. Hi a respontas dezañ e ranke debri da zul kouls ha war ar pemdez. Met kerkent e teuas he izili da zounna, ha ne gavas ar pare nemet goude beza diskouezet d'ar Zant he doa keuz bras d'he fec'hed. Labour sul, labour nul!



20 C'HOUEVRER, SUL AR C'HOUEC'H SIZUN (SEKSAJEZIM). — “ An hadenn taolet er park, eme Jezuz, eo komz Doue ”... Hogen e pelec'h e vez kayet komz Doue? En Aviel dreist-holl. Lennomp eta an Aviel, ...eur pennadig bemdez d'an nebeuta, ... ha poaniomp da veva dioutañ.

27 C'HOUEVRER, SUL AR PEMP SIZUN (KINKAJEZIM). — “ Kerz, eme Jezuz d'an den dall, da feiz he deus da zavetaet ”... Nag a dud a zo en dro deomp hag a zo dall o spered! Ne c'hortoz Jezuz nemet eur bedennig eus hor perz evit rei dezo ar pare... Pedomp eta, ha pedomp gant feiz!

An TAD.

KLOAREG E PARIS

Epad ehan-skol ar bloavezh 1698, an Ao. Grignon a roas degemer d'an dimezell de Montigny, deuet da Roazon evit eur prosez. O chom edo-hi e parrez Sant Sulpis e Paris, hag alies e komze eus ar c'hloerdi brudet digoret eno, n'oa ket pell c'hoaz, gant an Ao. Olier. Ouz he selaou, e savas c'hoant gant Loeiz-Vari mont di da echui e studi.

Ha dres, setu an dimezell de Montigny, distro da Paris, o kinnig paea ar bañsion evitañ.

Laouen bras, Loeiz-Vari a gimiad hep dale diouz e dud.

Ouspenn tri-c'hant kilometr a zo etre Roazon ha Paris... Evit ober an hent-se, eo ret kemer eul loen pe... mont war droad. Ar paotr yaouank a fell dezañ ober evel ar re baour. Ouspenn-ze, ne asanto kaout nemet eur wiskamant nevez, ha dek skoed en e c'hodell.

E contr, an Ao. Allain, hag e vreur Jozef, a ra gantañ eur pennadig bale, betek Pont-Cesson, wardro eul leo diouz Roazon...

Ha setu Loeiz-Vari e unan penn. En em lakaat a ra dioustu dindan gwarez Providañs Doue, hag hen diskouez a ra da vat... D'ar c'henta paour a gav war e hent, e ro e wiskamant



nevez; d'an eil, e arc'hant; gant an trede, e trok ar, wiskamant a zoug. Ha neuze, oc'h en em strinka d'an daoulin, e ra le n'en dezo biken netra war e ano.

Dieub, distak a bep tra, torret gantañ an ereou e stage ouz ar bed, "hep tad, hep mamm, hep breudeur, c'hoarezed na kerent all hervez ar gwad,

hep madou na tregasou", e kerz seder gant an hent bras, e japeled en e zorn pe eur c'hantik war e vuzellou. Beva a ra diwar an aluzenn; eur guchenn golo en eur c'hraou, ha setu graet e wele, pa ne jom ket dindan volz ar stered... Glao a ra, treuzet eo, leunbri... bale a ra atao en eur gana meuleudi da Jezuz ha d'ar Werc'hez.

Degouezout a ra e Paris, truilhennek ha faez. Petra raio? Ne gred ket mont er stad-se da gaout an dimezell de Montigny, hag e klask, repu en eur c'hoz marchosi, e lec'h ma kav e vevañs hep goulenn digant den.

Pa zeu da gaout e vadobereurez, houmañ a jom sebezet... E wiska a ra a-nevez, e bourvezi a zihad. Hag e-lec'h e ginnig da gloerdi Sant Sulpis, e kas anezañ da gaout an Ao. de la Barmondière, a rac wardro eun nebeud kloareged re baour evit paea o fañsion er c'hloerdi.

An Ao. de la Barmondière a welas danvez eur zant er Breizad yaouank a vrese enoriou ar bed betek en em ober paour ha klasker bara.

Loeiz-Vari, diouz e du, a yeas war eeun d'ar beleg-se, gredus ha santel. Ennañ e fizias e ene, ha gantañ e valeas war hent ar groaz, ar baourentez, ar maro d'ar bed. Bemdez e raio pinijenn, e skourjezo e gorf. Sevel a ra berrentez er vro, ha treut eo ar bevañs : Loeiz-Vari ne gemero koulskoude nemet an hanter eus e bred... Paris a zo eur gêr vras ha pinvidik : Loeiz a valeo enni atao e zaoulagad d'an douar... Karet a ra chom e unan penn, dero'hel peoc'h. Ahendall, ne oar komz nemet eus traou an ene, eus e garantez evit ar Werc'hez.

Ar studi kenneubeut ne jom ket war adreeñv. An Ao. de la Barmondière a zo doktor skol-veur ar Sorbonn, hag eno e laka e gloareged d'ober o studiou; beilha a ra warno e unan, ha rei dezo kenteliou; diou wech ar bloaz e rankont rei dezañ testen eus o skiant. Amañ kouls hag e Roazon, Loeiz-Vari en em laka raktal war ar renk kenta ha ne gilo morse.

Ne oa ket a vloaz c'hoaz abaoe m'edo e Paris pa' voe galvet da reseo

an urziou kenta. Izel a galon evel ma oa, e krene dirak eur seurt enor, ha ret e voe rei urz dezañ e ano ar zentidigez santel, evit e lakaat da vale gant hent ar velegiaj... En em denna a reas neuze epad eun nebeud devezioù en eun ti-retred, evit kempenn e ene. Fur groaz pounner a c'hortoze anezañ eno; oa ket echu c'hoaz ar retred pa deus dezañ ar c'helou eus maro an Ao. de la Barmondière.

Petra e teuo da veza bremañ, p'eo maro e vadobereur? Diskleria 'ra d'e contr, an Ao. Allain : " Rei a ran deoc'h da anaout maro an Ao. de la Barmondière, rener va c'houstiañs ha rener an ti-mañ Hefi eo en deus savet ar c'hloerdi ha va degemeret ennañ evit netra. N'ouzon ket c'hoaz penaos e yelo an traou, pe e chomñ amañ, pe ez in kuit... N'eus fors petra a c'hell c'hoarvezout, n'oun ket chalet gant kement-se : eun Tad am eus en neñv ha ne vanko ket din; va degaset en deus amañ, ha va diwallet betek hirio; heñ ober a ra c'hoaz gant ar vadelez a zo e Hini."

Degemeret e voe gant an Ao. Boucher, en eun ti all heñvel ouz hini an Ao. de la Barmondière.

Eno e c'hellas muioc'h eget biskoaz, brezelia enep e gorf. Eur binijenn oa mont ouz taol : ken dister e veze ar prejou ma veze naon pa ranked sevel diouz taol : fao hag irvin dre an dour oa ar gwella plajou. Keginer ebet : ar gloareged o doa "ar blijadur d'en em ampouezoni an eil egile" (Blain). Daoust da-ze, Loeiz-Vari ne vihanaas tamm e binijennou all.

N'oa ket evit padout evelse, hag eun deiz m'edo o pourchias ar boued e kouezas klanv, gwall glañv, kement ma voe ret e gas d'an ospital.

Deizioù hir ha kalet ar c'hlañvour a voe evitañ deizioù a levnezh. D'e vignon, an ao. Blain, e lavare : " An ospital eo ti ar baourentez. Hemañ a zoug an ano a "Hôtel-Dieu"; e ti an Ao. Doue emañ eta. Na pebeuz euredet!"

Epad e glenved, klemm ebet na zeuas war e vuzellou; ne voe gwelet war e zremm tresadenn eus e boan. Ar peoc'h a rene ennañ, hag an douster a galon : laouen oa ouz ar re holl a deue d'e welet. Evel boaz, ne gomze nemet eus Doue ha traou an neñv, hag a vezed kenteliou gantañ...

War wasaat e yae bemdez e glenved, ha ne jome douetañs ebet ken nemet gant Loeiz-Vari. Pa gomzed dezañ eus an eurvad en doa da vont dizale e Ti Doue an neñvou, e responte atao ne varvje ket, e ranke parea...

Ha parea a reas!

Eun nebeud deizioù goudeze, e kaned an Te Deum e kloerdi Sant Sulpis : den na ouie perak betek ma voe gwelet Loeiz-Vari o kemer plas e touez ar gloareged. Kavet oa bet tud vat da baea evitañ e bañsion, hag hiviziken e c'hello, dindan zorn ar wella Sulpisianed, kempenn e spered hag e ene evit e velegiaj hag e labour da zont.

Y. TRANVOUEZ S.M.M.

(Da gendec'hel).

(1) Gwellit Kroaz Breiz, n° 4 ha 5.

Eur ger diwar benn Mikel an Nobletz 1577 1652

Nevez 'zo, ez eus goulennet diganeomp holl poania ha pedi, ma vo roet gant Doue, dre c'halloud Mikel an Nobletz, an daou vuzud a zo ret evit ma vo diskleriet den eurus ar Misioner breizad.

An Ao. chaloni Kerbiriou en deus skrivet eun diverra eus istor Mikel an Nobletz, evit e rei da anaout da gals Bretoned n'o deus morse klevet ano anezañ. An Ao. Gwegen en deus troet ar pennad-se evit lennerien Kroaz Breiz.

Ra blijo gant Doue seveni hor goulennou evit e c'hloar hag hini e Zer-vijer.

BUGALEAJ HA YAOUANKIZ

Mikel an Nobletz, ganet e maner Kerodern, e Plougerne (Eskobti Leon), d'an 29 a viz gwengolo 1577, a oa mab da Herve an Nobletz, unan eus pevar noter roueel Bro-Leon, ha da Frañseza a Lesgwern, eus ouenn goz Koatma-nac'h. Ar pevare paotr oa eus eur familh hag a dlee genel enni unnek bugel, c'houec'h merc'h en o zouez.

Adalek e bevar bloaz, e roas testeniu anat eus e vertuz hag e zeolizez. " Me 'zo bet e ti Doue ", edo boazet da respont d'an neb her goulennate; ha d'e vamm nec'het gant e vont-dont, e lavare beza heñchet gant eur

gaer a zemezell — emichafis ar Werc'hez Vari — krog en e zorn betek chapel sant Glaoda, ha skoliet, ganti war e bedennou.

Ober a reas e genta studioù e *Sant Fregant*, e kichen tad e vamm, dindan lagad eur beleg, Thomaz Kozig; — da c'houde e *Plougerne*, e-lec'h ma heulias, warlerc'h kentelioù ar skolaer Jil Mazeaz, beleg, skol an daou veleg Eozen hag Herri Gourvenneg. D'e 18 vloaz, e krogas en e studioù e *skolaj Plouzeniel*, bleniet gant Alan ar Gwenn. C'houec'h vloaz e voe eho eur skoliad eveziek, troet d'ar bedenn ha d'ar binijenn, ha douget da rei kentelioù katekiz d'ar yugale all.

D'e 14 vloaz, e teuas Hor Zalver d'en em ziskouez dezañ. D'an cad-se ivez e roas diou wech lamm d'an Drouk-Spered, deuet da c'houeza soñjou louz en e spered.

STUDIOU UHEL

Da viz here 1596, Mikel, gant e dri breur kosa, a stenn dre vor betek *Bourdel*, da genderc'hel gant e studioù e skolaj Guyenn. Ar Werc'hez Vari a skoazellas anezañ meur a wech, dreist holl en emgannou a zave stank -ha-stank etre ar skolidi n'oant ket eus ar memes bro.

Da viz here 1597, ez eo aotreet da jom war ar studioù skolaj Tadou Kompagnunez Jezuz, e *Ajen*. Maout eo kouls er skrivagnerezh hag er furnez; muioc'h c'hoaz e trec'h e vertuzioù. Degemeret eo e Breuriez bugale Mari; mont a ra da welet ar re glañv; ober a ra katekiz, a-unan gant eur c'henvroad, Per Kintin, ginidik a Blouyann, hag a yelo diwezatoc'h; aliet gantañ, e urz Sant Dominig.

Wardro 1600, Mikel a zo tamallet e gaou en eun doare skrijus; ar Werc'hez a zired da gennerzi anezañ: "Mikelig, emezi, na ouelit ket! Va Mab ho ti-wallo ha Me ho sikouro!" Hag hi da rei dezañ teir gurunenn: glanded, deskadurezh ha disprij ar bed... Donezon gaer embannet gantañ 52 vloaz diwezatoc'h, war ewele a varo.

Diwar neuze ivez e tibab stad ar velegiaj, c'hoant dezañ eur pennad, da vont e Kompagnunez Jezuz pe e urz Sant Frañsez, ha chomet ker brao ha tra etouez beleien ar parrezioù.

Distrei a ra da *Vourdel* da gregi e studioù an Doueoniez (studioù an Ao.

Doue), ar Skritur Zakr ha lezennou an Iliz, e skol an Tadou Jezusted.

Rustoc'h c'hoaz eo eno e binijennou, kaeroc'h e oberou a drugarez. Gant Per Kintin hag eun nebeut kloareged all, e tiazaz eur Vreuriezh katekizerien hag a ya, daou ha daou, d'ober katekiz er parrezioù tro war dro.

E dilost 1606, echu e studi war an Doueoniez, e *tistro da Blougerne*. Lorc'hus outañ, e gerent a zo mall ganto her gwelet beleget. Heñ avat, a fell dezañ, gortoz ha beza suroc'h da veza galvet gant Doue.

Warlerc'h eun diviz graet gant Mikel war an Doueoniez, Eskob Leon, an aotrou Rolland de Neuville, a bro-met dezañ unan eus kaera parrezioù an Eskobti. Respont a ra d'e dad: "Gwelloc'h eo ganen mont da vesa chatal, eget beza person pe abad".

Ha setu heñ, war urz e dad, *mesuer*, harluet diouz ar gêr ha degemeret gant e vageréz. C'houec'h miz goude, e dad a aotreas anezañ da vont da *Baris* da zeski an Hebreeg e skolveur ar Sorbonn. Eno e kavas war e hent an Tad Cotton, kovesour ar Roue Herri IV, hag a zoug anezañ da c'houlenn ar velegiaj: beleg e vezo eta, met *beleg misioner e Breiz Izel*.

An dra-mañ a oa d'ar bloavezh 1607: Dom Mikel en doa 30 vloaz.

(Da genderc'hel)
F. GWEGEN.



Marvailhou rimet ar C'hloc'her.

Ma hoc'h eus eun dra da ober
her grit e poent hag en amzer:
Bihan pe vras, aes pe tenn,
kasit atao ho labour da benn.
Y. I.

Bremañ 'z eus meur a vloavezh,
setu petra 'c'hoarvezas en eur barrez,
etre Douarnenez ha Plougerne,
etre Landivizio ha Beg-Loumaze,
en eur barrez avelet a bep tu,
netra na jome enni war an dispalu!
(eur c'horn bro dispar, leun a dorgennou,
brudet dreist ar re all evit he roc'hou,
e-lec'h ma kaver abred ar saoudeka frouez,
per, sivil, avalou, prun, polos ha fiez),
gant eur soner eus va mignoned,
a veve alies e bro ar stered;
bihan ha teo, hanter-voal e benn,
lesanvet amañ C'HOUEZIGENN.
Bep bloaz e yae da Landerne,
da foar Vikael pe foar miz here,
da brena e zilhadr gloan,
rak aon en doa ouz ar goañv;
ne gare ket kaout rlou,
ha pa dostae ar frimou,
e lake dindan e jupenn,
diou pe deir zae-jiletenn!
Eur mignon bras din oa;
atao hen gwelen gant joa,
ha pa deue da Blouzane,
e paen dezañ eur banne.
Heñ e unan a gontas din
an istor-mañ hep c'hoarzin.
Met me avat a c'hoarze hag a c'hoarze!
Mignoned, d'ho tro bremañ, ... Marteze!

An eil son a oa sonet e parrez Avelear,
da zeiz pardon bras Sant Paol ha Sant Per:
Ar proesion a dlie ober, evel boaz,
tro ar bourg betek ar Groaz vras;
ha da deir eur e tlie mont en hent,
war-zu ar c'hornog hag ar vervent.
C'houezigenn a zoñjas: « Gwall hir eo va bleo!
Ret e ve din en em gempenn hirio...
Amzer am eus c'hoaz betek an trede son,
da vont da di ar perukenner, va mignon.
Ober a ray difre ma n'en deus ket ostiz ebet,
ha dont a rin en dro, touzet ha lipet-nê.

Setu C'houezigenn da di ar perukenner,
e traoñ ar bourg, war hent bras ar Gasker.
Jilez a oa azezet, ha, war gorf e roched,
a c'hortoze an ostizien pe e geneiled,
e gorn en e c'heniou, e lunsdou war e fri,
ha, kousket e harz e dreid, e daou gaz hag e gi.
« Selaou 'ta, Jilez, ne c'hellfes ket dre drugarez,
troc'ha din va bleo ha va baro ivez?
Eur paotr brao am eus c'hoant da veza
da zeiz hor pardon bras da vihana!
Evit enori Sant Per am eus atao karet,
rak « NE GAR KET AN TRAOU A-DREUZ », am eus klevet! »
— « Eo, eo avat, paotr! Dioustu, ma karez!
Mont a ran da c'houlenn gant ar vestrez
Va aotenn, eun torch hag ar soavon!
Ne vo ket peil ar stal! Azez war ar skaon
a zo dirak an nor ...A benn eun nebeudig amzer,
da zremm a vezo adarre sklaerët ha fichet kaer! »

* *

Setu war ar skabell azezet C'houezigenn,
gant e vouchouer-fri ledet en dro d'e gerc'henn,
dic'hoarz ha pözet kaer, evel eur gwir barner
o vont da renta e varnedigez d'eul laer!
« Serr da c'henou, ma torchin dit da fri,
a lavaras Jilez. Ar soavon evit eonenni
a rank beza rimiet gant nerz ha gant erbed,
evit renta ar baro bouk evel ar melfed!
Pa vez ar baro re hir pe re c'haro,
eo ret neuze her rimia gant dour vero!
Met da varo dit-te, paotr, a zo plegus,
Hag ober a rin va stal gant dour-yen ar puñs ».
Setu soavonet dremm melenek C'houezigenn
ha rentet heñvel-poch bremañ ouz eur vleunienn!
An diou jod a zo flourer, da c'houde an elgez,
hag an aotenn a gan evel eur skuberez.
Jilez neuze, a bak krog e fri C'houezigenn
evit peurachui a-zoare e oberiadenn.
« Evit ma lamin ar baro diwar da vuzellou,
bremañ, C'houezigenn, digor bras da c'henou! »
a lavar Jilez da vestr bras ar c'hleier.
C'houezigenn a zent dioustu, eurus ha seder,
ha setu e pemp munut echuet al labour,
ha rentet dremm ar soner adarre naet ha flour!
« Mont a ra ganeez avat, Jilez! Te 'zo eur perukenner
evel ma ne vez ket gwelet, sur oun, e kêr!
N'am eus santet na droug na poan ebet!
Diwar vremañ, me 'gaso dit kamaladed!
Me a skigno e pep lec'h da ouizlegez,
te a zo hag a dle beza barver kenta ar barrez!
Deomp bremañ da gemeret pep a vanne,
en ostaleri tosta, e ti Felisite! »

* *

« N'eo ken div eur ha kard », a lavaras ar soner,
o sellet ouz an orolaj staget ouz ar voger.
Mardouenn! Marteze, Jilez, goude va baro
e c'hellfes c'hoaz troc'ha din va bleo?
Tri-c'hard eur hon eus araok an trede son,
araok ma yelo er maez ar prosesion.
'Mechañs, e ouzez dornata ar sizailhou
evel ma ouzez ken brao diouz an aotennou! »
— « Ya, ya, paotr, bez dibreder; gant va zouzerez,
me raio dit, e berr amzer, eur penn nevez!
Pevar ostiz an eur a c'hellan servija,
ha c'hoaz zoken hep en em zifreta!
Deus neuze da azeza war ar gador, ma karez,
epad ma 'z in da gerc'het va zouzerez.

« Felisite! Lakit deomp ar memes tra!
Ne valeer ket c'hoaz war eur c'har er vro-mañ!
Ha pegwir emañ hirio gouel bras Sant Per,
eo ret din diskouez va anaoudegez d'ar soner! »
Goude beza evet daou « vele-kasi »
Jilez ha C'houezigenn a guita an ostaleri...
Setu adarre C'houezigenn bremañ azezet,
gant e vouchouer en dro d'e joug skoulmet.
Jilez, gant e douzerez, a c'houlennas digantañ :
« Penaos e vo troc'het dit da vleio bremañ?
— Penaos??? Met Jilez, an touse ma c'helli.
Epad an hañv am eus atao atampi
da gaout aer da va fenn : gwelloc'h e labouran,
ha zoken kals yac'hoc'h en em gavan!
— Kastilhez!... Da douza a rin evel eur vi, mar kerez...
Met soub! mat da benn neuze, a respontas Jilez.
Bleo C'houezigenn a bile dindan an douzerez,
evel ma kouez an ed dindan ar vederez.
An hanter eus e vleio a oa bremañ troc'het,
pa laoskas C'houezigenn eur griadenn ankeniet :
« Aiou, Jilez! Gwall zacha a erz war va bleo!
Evel pa glozfas ar foenn, pa gouez puilh ar glao!
Aiou, Jilez! Aiou! O diwrizienna a rez!
Va diskroc'henni a ri, ma ne rez ket evez!
— Hañ? poan a ran dit, C'houezigenn gêz?
...Ya, eur pennad 'zo eo tafet va zouzerez...
Met ken mall am eus d'az touza naet ha flour,
ma yaen, daoust da ze, dilo gant va labour...
Met mac'h eus re a boan, gortoz eun tammig :
mont a ran da gerc'het eol en eur podig,
hag eur wech m'am bezo lardet va zouzerez,
e yelo adarre kerkouls hag unan nevez! »
C'houezigenn a c'hortoze, hanter douzet,
ma vije dizroet Jilez gant e venveg eoliet.
Soñjal a rae : « War an hent-mañ 'dremen kement a girri
ma ne glevan emañ eur ebet o seni.
Mont a ran da di Felisite da c'houlenn an eur... »
Felisite a oa c'hoaz e tu da skuba 'l leur.
« Pet eur? Ne ouzon ket! Teir eur moarvat!
An eil son zo sonet, bremañ 'z eus eun tachad!
Va orolaj, ouspenn eiz dez a zo,
a zo tardet krenn ha chomet a zao!
Div eur ha kard a verk abaoe disul diweza,
met bremañ, sur oun, eo teir eur, d'an nebeuta! »
— « Teir eur!... N'eo ket posubl! a zoñjas C'houezigenn
Felisite, n'eo ken 'met eur goz randonenn!

* *

C'houezigenn a zistroas da azeza war e gador,
hag e-lec'h eur barner, e seblante bremañ eur pabor!
« Jilez! Landore! Hasta buhan! An amzer a ya en dro,
hag abarz nemeur an holl am c'hlaso,
gourc'hemennet gant an Aotrou Person,
evit lakaat e brall ar prosesion! »
Jilez a deuas d'ar red gant e douzerez eoliet,
ha setu adarre C'houezigenn krabanatet.
« Ac'hanta, paotr! Mont a dle gwelloc'h bremañ
ha ne lavari mui ez an d'az tiskroc'henna! »
C'houezigenn a grize e fri hag e dal :
moustra a ranke ober, evit miret da youc'hal...
An douzerez muloc'h-mui a ziframme e vleio...
« Aiou, Jilez! Lechefre! Lak evez evelato!
War fallaat e ya da venveg milliget!
Ehan gant da douzerez... Kerz da gerc'het
eur zizailh da beurachui da labour...
Tremen point eo din mont war-zu an tour...
Alc'houez dor an tour am eus e va godell...
Ar c'hleier n'o deus 'met daou vestr : ME hag an AVEL! »


— Me, paotr, ne ouzon netra diouz ar sizailhou...
 Gant an douzerez hepken e ouzon troc'ha bleoloul...
 — Hañ? Ne ouzez ket dornata eur zizailh?
 Hag e teui c'hoaz da lavaret ez out eur mailh
 war ar bennerez, ar c'habellevez pe ar razerez?...
 N'out nemet eur bannezenn, m'hel lavar dit fraes!!!

Ep ad an amzer-ze, e tour Avelaer
 Ar c'hloc'h a dinte 'vit gervel ar soner :
 ar gurusted, ar c'hloc'her, a bep tu a rede,
 Hag atao C'houezigenn digavus a jome.
 « Klafiv e tle beza, a zoñje an Aotrou Person,
 Lakomp daoust da-ze e brail ar prosesion! »
 Ar prosesion a oa a-vec'h diblaset,
 ma voe gwelet C'houezigenn o tont, pennfollet,
 eur mouchouer war e benn evel eur Muzulmad,
 rak e benn hanter-douzet en doa da guzat!
 Pignat a reas en tour da vralla ar c'hleier,
 ha sacha a reas warno gant fioñ ha kounnar
 ouz Jilez, ar perukenner, a c'hoarze, me 'gred
 o soñjal e C'houezigenn chomet hanter-douzet.
 C'houezigenn, a nerz korf, ar c'hleier a vrallas,
 met n'oa ket gant joa na gant grad vat, siouaz!
 Desket en doa bremañ : zoken da di ar perukenner,
 pep hini a rank mont e poent hag en amzer!

Goude an abadenn
 erruet gant C'houezigenn,
 morse na zivinoc'h piou a c'hoarzas ar muia!...
 Hel lavaret a rankan deoc'h : e hini goz, Biganna...
 Ha bremañ, etrezo pa vez an traou trenket,
 e wreg 'lavar dezañ : « Chom peoc'h, HANTER-DOUZET! »

Yann-Bonig LAGAD-EEUN.

Pep gwir miret striz.



Sant-Malo araok ar brezel

Gwechall e Kerwenn (Kendalc'h)

AR GOUNID KERC'H

E pep tiegez, e vezer abred war
 zay, rak

“ Sevel mintin, kousket abred,
 A zegas madou, furnez, yec'hed ”.

Per a zivorfil bemdez da genta, ker-
 kent ha kanaouenn ar c'hilhog :
 “ Soaz, Soaz! Poent eo sevel ”.

Tud ha chatal a zihun nebeud ha
 nebeud... Araok goulou deiz e vezo
 graet kals labour...

An eiz pe nao a gezeg, bras ha
 bihan, a c'hed o zamm kerc'h en eur
 baota. Saig, ar mevel bras, en em gav
 gant eur c'hrouerriad evit rei diou voz-
 zad da bep hini... Ober a rei gwelienn
 d'ar chatal a zo o larda...

Mikael, an eil mevel, a zo o trailha
 karotez, panez... War ar garrigell e
 tegaso ar boutegadou betek dor ar
 c'hreier.

E-keit-se, karzomp an teil da deurel
 war ar bern, er porz, rozellomp piz leu-
 renn ar c'hraou... Eur gwiskat kolo
 fresk da leda e pep speurenn gant ar
 forc'h koad... Evit peurechui, eur gu-
 chenn foenn e pep rastell..., peadra
 da gas kuit ar c'hoant-kousket, n'eo
 ket 'ta?

Demheñvel e vo graet wardro ar
 jatal-korn, a zo anezo dek pe zaouzek
 gant al leueou bihan hag ar c'hole...
 Soaz eo a ray ar muia en tu-mañ,
 goude beza lakët ar pred war an tan.
 Awechou, unan eus ar wazed a deuió
 d'he sikour. He diou verc'h kosa a
 roio dorn ivez evit goro ar zaout, ha
 da c'houde, evit ober ar ribotadenn e
 lost an ti.

Chom a ra c'hoaz ar moc'h, tri pe
 bevar; ar yer, den ne oar pet... Ar
 re-ze holl a c'hortozo diwzatoc'h :
 e karg ar merc'hed e vezint goude
 dijuni.

Pep hini a grog er pred kenta : sou-
 benn ar brigen pe boued-laez, leun
 ar skudell; bara hag amann, gwalc'h
 ar c'halon.

“ Digor eo ar straed? a c'houlenn
 Per.

— “ Da eo, a respont unan : eur
 zac'h goullo ne jom ket pelle en e
 zav! ”

Den ne vank ouz taol : ar vugale
 zoken a zo aze, gant daoulagad pi-
 kouzet marteze, pe o tislevi-gen war-
 lerc'h o c'houk... Bremaik e vezo
 poent mont d'ar skol : da eiz eur e
 tigor. Ne blij ket d'ar vugale beza war
 ar prim : eun eur araok e vezo mat
 loc'h evit ober an hanter leo a zo
 ac'halenn betek ar bourg.

Klevet a reer bugale o tremen war
 an hent? Buhann, al loereier gloan, ar
 boteier-koad, ar zac'h bihan gant eun
 tamm bara! Deomp! emezo. Daou
 vreur, diou c'hoar ha daou genderv
 a zo, ar re-mañ kemeret gant Soaz
 abalamour m'eo re bell o c'hêr diouz
 an ti-skol.

An divesker berr a astenne, gant o
 leo vale pemdeziek!

Da greisteiz, ar vugale a gavo eur
 banne soubenn domm en davarn. Da
 bader eur e tizroint evel m'int aet,
 en eur c'hoari... desket ganto eur ger
 galleg bennak..., atao o komz bre-
 zoneg evelato!

Ar wazed kenneubent, ne gollont
 ket o amzer e starn an daol : da c'hou-
 nit kerc'h ez eer hirio. Pep tra a rank
 beza aozet abenn ma teuió an deiz
 da zevel.

Starniomp ar c'hezeg; kemeromp
 an daou alar : an hada bep tri bomm
 eo a vezo graet.

Yao! warzu Park al Louarn. N'emañ
 ket pell : n'eus nemet sevel d'ar groaz
 dirak an ti, treuzi an hent a ya eus
 Gwikourvest da Wikar, sevel a-hed
 ar park bras, ha setu ar jao el labour.

Ar c'hesad a zo warlerc'h gwiniz :
 an douar aes kenañ da arat. Tri bomm
 a vez kignet diouz renk, gant an alar
 bihan : warnezo e vez hadët ar
 c'herc'h gant an dorn. Neuze ar jao
 a vez staget ouz an tumper, evit sevel
 douar da veza ingalet war an had a
 dreuz an ero.

Ar mevel bras a zo gant ar c'hezeg,
 ar fouet en e zorn.

Kropot eo an daouarn, daoust
 m'emaomp er gwasked, goudoret gant
 kleuziou keunneudet kaer. Ar park a
 zo war eur gwall dorgenn, hag an
 avel -biz a zo yut.

Ac'halenn, an taol lagad a gas pell war ar vro. Pa 'z eus eun taol ehan hag eur c'horniad butun, sellomp a lark.


Kostezenn Gwikourvest ha Gerruaz hepken a zo kuzet ouzomp gant ar c'hac'ad dero ha kelvez, warzu ar reter hag ar gevred.

En izel hag er gornaoueg : Laneun-ved, pe gentoc'h tokajou gwez pin, kistin ha gwern. Ne weler ket an tiez, kuzet ma 'z int evel neizioù..., betek Bodiliz.

Ar bourg, er c'huz heol, a zo tost awalc'h evit ma vo klevet atao mouez ar c'hleier. Ar vouez-se eo a lavaro an eur; hi eo a reno ar vuhez dre ar barrez.

A gleiz hag a zehou, e welomp lojeiz dindan soul pe dindan sklent, skignet evel bokedou er prad d'an nevez amzer. Rummadou tud a vez gwelet o trei douar pe o fagodi... Ni a anavez pep hini, diouz e barkeier; kaozeal a reomp diwarbenn hemañ pe henbont : Bon a Bennwern, kollet en a lagenn, betek ar zec'hor; Kolaz an Traon, hag a ya re alies d'ar foarioù : " Trafiker pe gourater ne gas ket e diegez war well " ! Dre ma teu da veza den an arc'hant, e pella e galon diouz al labour-douar : setu eur galouper, eur glabouser muioc'h war an douar...

Demas amblez, ar siminalou, a dost hag a bell, a stag da zivogedi : ar pred



Er gwalarn, tiegeziou niverus ar-
C'hrec'h. Pelloc'h adref, maner Ke-
ryann etouez ar gwez fao. Eno, abarz
an noz, ec'h en em gavo, eus pevar
c'horn ar vro, eur mor a vrini. War ar
skourrou pe er c'houldri emañ o c'hêr
d'al laboused.

En hanternoz, kals touriou : hini
Berven a weler a bell bro, hervez ar
c'hantik, hag ivez kals re all ouspenn!

A dost dirazomp, tiegez Kerwenn :
ar foenneier a hed an draonienn, a bep
tu an douarou stag-ha-stag. E kreiz,
evel ar galonenn, tiez, krevier, porz,
leur, liorzou, grac'hellou kolo, foenn,
keuneud... goudoret gant gwez uhel
war ribl ar ganienn. Fur mellad keria-
denn e seblant beza. Gwechall e oa
daou diegez : p'eo marvet ar vistri,
paotred yaouank koz, ar perc'henn
nevez en deus roet ar stal abez da
Zoaz.

a zo war an tan... Ar c'herniel-boud,
en eur lakaat ar chas da yudal, a c'hal-
vo d'ar gêr al labourerien ingalet dre
ar parkeier, hep aon rak ar goañv.
Gwir eo : " gwella tomm d'an treid
dre ar botou, ha d'ar c'hov dre ar
genou ".

Setu poent lein. Ar c'hèzeg er
c'hraou, ha bouetet dioustu. Ar wazed
a walc'h o daouarn er veoliad dour
dirak an ti. Ha bec'h d'ar pred, gant
al loaiou koad kemeret er parailher.
Ar podad yod silet a zo war an dor-
chenn, skudelladou laez tro war dro.
Ar c'here'h a ro nerz d'ar c'hèzeg :
perak ne rafe ket heñvel d'an dud?
Da echui, evit genna a lavar Mikêl,
eur skol-pennad vara, lardet a zoare.
Ar pilherad amann a vez atao war
an daol. Hag araok sevel diouz taol,
eur bedenn : Angelus ha De Profundis
d'an nebeuta.

" Deomp adarre ", eme Saig : an
deiz a zo berr er niziou du. Ar park
ne ra nemet eun devez arat : chom a
rei koulskoude kals da ober, eur pale-
farz marteze, rak ret e vezo, emberr,
mont da droc'ha lann-bil da waremm
ar C'harlostenn.

Seiz pe eiz bec'h lann a vezo dega-
set : magadurez yac'hus d'ar c'hèzeg.
Gwechall, al lann a veze malet en eur
bigosat warnañ, pell hag hir, gant
mailhou koad. Al laouiri evit al labour-
ze a zervij bremañ da zegemer ar glao
a gouez diouz an toennou : amañ hag
ahont ez eus an hevelep laouer; al
loened a gav enno dour da eva, an
dud peadra da walc'hi o daouarn.

Hirio al lann, mesket gant geot, a
vez troc'het munut gant lañvennou an
drailhaez, lakêd tro enni gant eun den
ha bouetet gant unan all. En hor
c'horn bro, ar jatalerez eo ar binvidigez
vrasa : ar muia labour a ro ivez, sul,
c'houel ha pemdez.

Ar vugale, dizro eus ar skol, a zo
mall ganto lakaat o fri e pep lec'h,
lost al labourerien : wardro ar zaout
dreistholl. O mamm a zo eno o c'horo,
ar c'hoarezed vras ivez. Ouspenn, eno
o deus kavet daou leue bihan hag eun

dañvadez, pezh a ra kals plijadur d'ar
re vihan. Gwella ma c'hell, Soaz a
zalc'h he bugaligoù er goudor, da c'hè-
dal ma 'z ay d'an ti evit o dastum en
dro d'an tan, goude beza klozet ar
c'hrevier en eur lavaret : Sant Herbot
o diwallo!

En ti neuze e vez meneg eus ar
skol, ar gerioù desket, ar fablenn da
zibuna... Hep dale Per en em gav en
e gador : piou a deuio da genta war
e varlenn? Da c'hèdal koan, e vezo
fistoulet gant ar re vihan. Ma c'hou-
lenn unan anezo, e vo kanet eun
Nouel, eur c'hantik pe son ar Fume-
rezed :

" N'eus netra ken etourdi
eged ar fumerezed :
kent eget chom hep fumi,
ez eont da glask o boued.
O ziez a zo dilogod,
rak n'o deus na bara na yod.
A vec'h eo deo zoken
gellout golei o c'hroc'hen " !

Pa vezo deuet an holl, e vo debret
koan, ha graet eur pennad tomm.
Ne bado ket pell an abadenn : abred
e ranker beza er gwele, goude beza
lennet Buhez ar Zent, ha lavaret gant
an holl, war an aolad, ar pedennou
diouz an naz. H. GREFF.

A-DREUZ BREIZ-IZEL

Er pennad-mañ, e vo kavet eun dao-
lenn eus ar gwel dudius a c'hortoz e Lo-
kornan-Kerne ar Vretoned o devezo an
eurvat da gemer perz er Bleun-Brug da
viz eost 1949 : ra bleustrint warnañ evit
trei o spered etrezek ar c'haerderioù a
splanno neuze dirazo.

Taol-lagad.

Eur zulvez vintin; eun devez dudius;
devez ar bedenn, devez Doue.

E oa dija gwall uhel an heol a-us d'an
dremwel, eun tammig beuzet e vannou
skedus en eur vogideli wenn, tano kenañ,
pa erruis war gern Menez-Lokorn.

A-hed hent-karr a bign d'an nec'h, am
boa pedet a-greiz kalon, ha seulvui ma
saven, seulvui e seblante din tostaat ouz
va Doue; tostaat ouz Sent va Bro; to-
staat ouz sant Ronan, en deus bet san-
telêl al lec'h-se, o lezel war e lerc'h kement
telêl al lec'h-se, o lezel war e lerc'h
kement-all a eñvoriou santel.

Eur perc'hirinaj e oa evidoun ar valea-
denn-ze, eur perc'hirinaj en enor da
zant Ronan, a-dra-zur, met ivez en enor
da holl Sent va Breiz, adalek ar seiz Sant
betek sant Erwan a Landreger.

Hag endra ma saven, o gwelen o veva
dirazoun, o kerzet ganin, o c'houeza em
spered nerz, sklerijenn ha karantez.

Nerz, n'eo ket hepken da bignat war
ar menez, met ivez da gendrec'hel gant
va labour pemdeziek, va labour evit va
Doue hag evit va Breiz.

Ma vo, dre va labour dister, Doue
muioc'h anavezet ha muioc'h karet;

Ma vo, dre va labour dister, Breiz
muioc'h anavezet ha muioc'h karet.

Ma chomo, dre va labour dister, Feiz
ha Breiz, Breiz ha Feiz, skoulmet da vat
keit ha ma pado Breiz.

Sklerijenn, ma komprenin ervat, her-
vez Doue, talvoudegez al labour divent,
boulc'het gant eun toullad Bretoned a
volontez vat, hag o deus touet adrei d'hor
Bro eun ene glan, eun ene santel, eun ene
laouen, d'ar mare ma 'z eus kement-all
eus he bugale gant eun nerz diaoulek,
ouz he freuza 'vit he stlapa d'an traoñ.

Karantez dreist-holl! Aze eo emañ
bouedenn nerzus hor Feiz kristen. Ka-
rantez evit hor breudeur, daoust d'o fa-
zioù, daoust d'o fallagriez; karantez hag

a ziwano warni unvaniez levezet ha peoc'h...

... Ha me war gern Menez-Lokorn.
Hag e tride va c'halon, hag e kane va spered :

" Amañ pell diouz an trouz
hag holl safar ar bed,
Ar meziou am c'helenn kenkoulz
Hag ar ouizieka doktored "

O peoc'h dudius ar meziou gouez, pell diouz lagad an dud, met tostik da Zoue, na pebez douster tañva ac'hanout eur pennadig!

Na pebez douster ankounac'haat en-nout trubuilhou eur vuhez ken prederiet ha ken c'houero re alies!

Na pebez douster en em goil ennout evel e mor divent karantez Doue!

Bez' ez out, o Menez gouez, evel eun iliz-veur a-zioc'h ar bed, el lec'h emañ Doue o chom, el lec'h ma komz e gwirionez e pleg ar skouarn, el lec'h ma weler anezañ gant daoulagad ar c'horf.

E-keit ha ma troidelle an holl zoñjouze em spered, evel kandrant an alc'houeder a-us d'eur parkad ed melen luskellet gant an ezenn flour, va sellou a lamme dreist an torgennoù tro-dro, betek an dremwelioù pell.

Kaerat taolenn!

Ar re n'o deus ket evel doun, taolet, evel pa lavarfen eus an nefiv, eur zell war hor Breiz, ne ouzont ket pegeñ kaer eo.

Emañ aze, dirazoun, palleñ glas-moug pleg-mor Douarnenez, o lintra, evel perlez arc'hant dindan strinkou tan an heol beure.

Pelloc'h emañ ar mor bras, glas ha plaan, divent, divent...

Ha penn-da-benn dezaf, linenn droidellus an douar o c'hoari gant an dour sall,

KELEIER.

Plogoneg. — D'an 10 kerzu 1948, eo ganet, e tiegezh Rheun ar Berr hag e bried e Plogoneg, Ronan-Kaourantin-Thelovari ar Berr.

Hor gwella gourc'hemennou d'ar gerent, ha buhez hir da Ronan!

Bec'h d'ar Brezoneg!

Gwellaat a ra ar stal gant kelennadurezh ar brezoneg er skolioù... Kannaded Breiz a zo kroget a zevri gant an abadenn, dirak ar pennou bras karget eus an deskadurezh er vro. Setu penaos emañ ar stal, warlerc'h eur vodadeg graet e Paris d'an 28 a viz kerzu diweza :

— Kentelioù brezoneg a c'hello beza roet en holl Liseoù ha Skolajou eus Pennar-Bed, hag e re al lodenn vrezonegerezh eus ar Morbihan hag Aodou-an-Hanternoz.

— Da studieren ar pevare bloavezh e

war an trêz gwenn, ar bili flour pe ar reier garo, adalek Lokmaje Pennar-Bed, betek beg Pennmarc'h.

En tu all : an douar bras.

Ar Menezioù-Du a-zehou, ar Menezioù-Are a-gleiz, a red dirazoc'h evel diou vandennad chas o taoulamm, o sevel er vann o c'heinoù rouz.

Ha dre holl, traoniennou kamm-digamm, leun a freskadurezh, a c'hlastr hag a gan, eur bern sterioù hiboudus ha kil-droennus o redek dreizo.

Amañ hag a-hont, niverus, niverus, keriadennou, bourc'hoù, bedet en dro d'o ilizou evel neiziadoù yer-bihan en dro d'o yer koz...

Ha setu va Breiz! Breiz en he c'haer;
" O Breiz-Izel, o kaera bro,
Hoad en ha c'hreiz, mor en ha zro "

Endra ma tiskennen laouen diwar Menez-Lokorn e soñjen ennoun va unan, er pezh a lavaras din eur mignon n'eus ket pell :

" Ar Vretoned ne ouzont ket pegeñ kaer eo o bro. Daoulagad o deus ha ne welont netra ganto; diskouarn o deus hag int pounner-gleo... Dleet e vefe dezo mont d'al lec'h all, evel m'oun bet, evit gwelout, evit klevout, evit dijelei o bro.

Foueta bro am eus graet epad daou-ugent vloaz;

Bet oun er Stadoù-Unanet Amerika, bet oun o chom er C'hanada, galoupet am eus pevar c'horn Bro-Zaoz... hag e nep lec'h, kredit ac'hanoun, n'am eus kavet bro all ebet kaeroc'h na plijusoc'h eget hor Breiz "

Mar deo kaer hor Breiz, pinvidik eo ivez; Hen diskouez a rin deoc'h er wech all.

V. S.

Skolioù Normal an hevelep lec'hioù e vezo gelllet ive rei kentelioù brezoneg.

— Er vodadeg kenta a vezo dalc'het gant Kuzul Meur an Deskadurezh, e vo tabud diwarbenn lakaat kentelioù brezoneg e kement bloavezh er Skolioù Normal, ha degemer ar yez vrezonek er " Vachelouriez " : goulennet e vo, araok, o ali digant izili eus an U.D.B. (Unvaniez difennourien ar brezoneg).

— Diskleria a ra Renerien an Deskadurezh n'o deus enebiezh ebet ouz kelenadurezh ar brezoneg er skolioù, hag e raint eus o gwella evit kompez a an traoù e lealded.

Laouen omp ouz her c'hlevet. Desket ez eus deomp koulskoude, pell'zo, barn eus an oberou, ha nann eus ar c'homzou. Ne c'houlennomp ket gwelloc'h avat eget kaout da strakal hon daouarn, ma vez graet an traoù hervez ar gwir!



teñzor an dintin goz

(Kendalc'h, Niv 2)

Gant Ab-Sullo

Fañchig Kideller a zo deuet da gaout Laouig, ar marichal, bas-valan brudet, da c'houlenn digantañ mont, en e ano, da vaner ar C'hoad, e-lec'h m'emañ Soazig an Togonou, e vuia-karet.

En devez warlerc'h, da zerr-noz, e tegouezas adarre Fañchig e ti Laouig, hag eur pennad goude, edont o daou o kerzet etrezek maner ar C'hoad, tost da dri c'har-deur-bale ac'hano dre an hent bras, hag eun hanter leolig en eur droc'ha berr.

An diskar-loar ez oa, ha tefival sac'h anezi.

Lerc'h ouz lerc'h, an daou veajour a dreuzas gwaremm ar Bougidou, en eur lakaat ar yeod brek da wegal ha da derri dindan seuliou houarnet o boteier-koad, nevez amgarget a goz fresk, tra ma viaoue ar c'haouenned war benn ar pilgosoù dero, ma rede al lern warlerc'h ar goulined, ma klaske ar bugel-noz e zefived, ha ma wigourre karrig an Ankou digernezh, o vont da duta war ar maezioù...

Tizet ganto ar porrastell a gloz war liorz Janig, e lavaras Laouig da Fañchig :

— Alle! paotr, chomomp peoc'h gant hor genou bremañ avat!

— Pegwir omp en em gavet tost, a gendalc'has ar c'houerriad.

— Ya, kanfard! Ha dreist-holl, te, gant a ri, diwall da c'hlabousat re... eur wech ma vezi aet en ti; e giz all, emañ kazeg ganti! Intent a rez ac'hanoun-me, farouell?

— Ober a rin diouz ho kelenn, Laouig!

— Ma, neuze, kent mont larkoc'h, ne rafes ket fall o rei din-me ar peurrest eus ar priz a voe divizet kenetrezoomp hon daou, dec'h d'an noz. Deuet eo ar poent evidout da larda ar billig, ar baelon hag ar grampoezenn!

— Larda ar bill...

— Hag o larda mat kement hag ober... ma fell dit ez afe difreuz an traoù en dro ganeomp! a droc'has ar jubennour en eur lakaat, bep ar mare, e staoñ da stlaka gant e deod flour.

Ar paotr yaouank a lakeas neuze eur pezh a zek lur e dorn kaledet ar marichal bras : hemañ a gasas timat al Lociz-aour da gaout al lagad ejen a oa kuzet en e yalc'h vutun. Gwall dano e vije fri Annaig, e wreg, m'he dije santet ar c'houez anezañ el lec'h-se!

A vec'h ma oa lakaet gant an daou waz o zreid el leur, setu ma stagas ar c'hi da harzal en eur zacha war e raou. Laouig a astennas e gammejou, a c'houezas e fri gant e vizied hag a lopas tri daol war dor ar verouri. Neuze e savas eun tamm keflusk en ti koz, ha prestik goude, diwaller ar maner a zeuas da gichen an nor, hag e c'houlennas gant eur vouez c'hroz :

— Piou a zo aze?

— Me an hini eo, Saig! a youc'has ar vazvalan. Digor an nor deomp 'ta!

— Daou emaoe'h evit doare, a gendalc'has ozac'h ar verouri en eur gornzigeri an nor.

— Kredabl, sur! Petra, ne glevet ket da gi o lavaret dit : „ Daou, daou ”, pe neuze... bouzar e vefes?

Saig a beurzigoras dor e di, hag e lavaras :

— Hañ! daou emaoe'h! Doueti a raen ne vefe ket deuet Laouig ar marichal amañ e-unan! eme an ozac'h gant eur vouez estlamm; deuit tre 'ta, paotred! Bezit sederoc'h eget ne doc'h; hag it d'al laez d'ober eun tamm tomma pa ne vefe ken!

(Da gendalc'hel)

C'HOARIOU


Divinadennou.

1. — Petra 'astenn he buhez,
pa vez laz et hep truez?
2. — Petra a ya hag a zeu ive,
ha ne guita he flas morse?
3. — Ful louzaouenn 'zo er bed,
gant ar wazed eo karet,
ha gant muioc'h-mui a verc'hed!
4. — Me 'm eus eur c'hreunenn rouz em zi,
d'an holl verc'hed e ra avi!

Gerioù-kroaz al Lagad-du, n° 8.

A-blaen :

1. — Labousig atao laouen.
2. — A reer pa vez sec'hed. Eus ar verb BEZA.
3. — Rannig-nac'ha e Bro-Dreger. — Kensonennou (consonnes) GANET.
4. — Eur gensonenn, diou wech. — Danvez lien.
5. — Galv hep trouz! — Hir, ma ne vefe ket dibennet.
6. — Polos bihan gouez. — Niver.
7. — Hoala, dibennet. — C'hoant.
8. — Rannvro e Iwerzon an Hanternoz. — Lost azenig.



A-zerz.

1. — Tiez hag a zo enno kals levrioù.
2. — Ster e kichen Kemperle. — Dibaot pe rouez.
3. — Danvad bihan. — Lakaat da dremen dre doul-
lou bihan.
4. — Kemerit ar blantenn-mañ, m'ho peus ler kalet
war ho taouarn.
5. — Lakaat a rin ar c'hanab en dour.
6. — Lavaret alies gant ar bugel penn-fall. — Tonn
eo!
7. — Eur roudenn warlerc'h an alar. — Dindan ar
sivi e Plougastel.
8. — Kensonennou eus NAERATA. — Tri, bihanik
avat.

NA ZEBRIT KET A GOLO!

Da viz here, warlene, e save war an daol evit beza oberatet ("opéré"), e ospital Antrim en Iwerzon, eur c'hlañvour hag en em glemme eus e boan-gov eur pennad a oa. Ar vedisined avat a oa nec'het awalc'h o klask kompren perak e veze ken bec'hiet, arack, e-pad ha goude e brejou...

Pa voe digoret kov ar c'hlañvour, e voe kavet kerkent ar perak : tost da ziu luriad kolo a oa berniet e stomog ar gwaz!


Karget oa an den eus eur c'hraouiad kezeg, hag e serr boueta e jatal, e lake en e c'henou pennadou kolo, a gave awechou an tu da ziskenn izeloc'h. Ha dre hir amzer en doa savet en e ziabarz ar bernadig kolo-ze!

Taolit evez : dalc'hit ho kolo evit ho chatal!

SPEAK...

Bugale eus kichen Montroulez, a zistag ar rimadell-mañ, en eur ober an neuz da gomz Saozneg :

Speak! (lavaret : spiig)
Chacha war e lost-pig.
Yes, mammig hêz,
Dour n'eo ket lêz,
Ha piz n'eo ket fao,
Beza foetet n'eo ket brao!



Gerioù-kroaz al Lagad-du evit Nedeleg.

Divinadennou : N° 9

1. — Eur gador. — 2. — Eun den
krog en eur garrigell. — 3. — Eur pre-
nestr. — 4. — Eur c'harr-nij.

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h mab

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03



Levrioù-skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar burevioù

Levrioù-ofereñn

Levrioù-kan

Levraoueg

Poupées Broderies

Le Minor

Pont-Sabbé



Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec - QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Imprimerie Centrale de Bretagne



EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir
RENNES

AR BREZONEG ER SKOL

— Ar brezoneg er skol! Ar brezoneg er skol!
— Petra 'glevan diganez? Ar brezoneg er skol! Sot out ?Emaout e soñj lakaat ac'hanomp "mod-koz", degas en dro amzer ar sklaved, ar roueed mistri war an holl ha war bep tra?

— "Mod-koz"? A gav dit? "Mod nevez", a gredan kentoc'h : rak ar brezoneg er skol, en arnodennou : bachot, breved, santifikad... kement-se n'eo ket bet gwelet morse c'hoaz evit mat, Hag eur c'hiz ha n'eo ket bet gwelet morse a zo, sur, eur "mod nevez", neketa? Ar merc'hed, o tougenno broziou hir, a zoñj dezo beza "mod nevez" (new-look, e galleg!); n'eo ket gwir?

— Ya, zur!

— Ha koulskoude n'eo ket ar wech kenta, pell ac'hano, d'an dimenzelled da guzat o divesker betek o zeulioù! Ma, ar brezoneg er skol, ar brezoneg en eksaminou, a vefe eur c'hiz nevesoc'h eget hini ar broziou hir!

— Hum!... Ya, ya... Met *re nebeud a dud* a gomz brezoneg. N'eus nemet al langachou bras, ar broziou bras...

— Hag a c'hell beva! Ar re vihan n'o deus nemet mervel? An dud vihan memes tra, hañ! Ar re n'o deus ket daou vestr n'o deus ket ezomm da zebri, eveljust! Te n'out ket bet bihan morse? Eo? Hag out bet lezet da veva!

— N'eo ket ar memes tra evit an dud! Met al langachou bihan...

— A vez desket er skolioù muioc'h eget na zoñj dit! Klevet ac'h eus ano eus *ar RUSI*?

— Eur, vro vras, paotr paour, eur vro vras, bras!...

— Ya 'vat. Met n'ouzez ket e vez desket eno, er skolioù, yezou, pe langachou eus broziou bihan kenañ? Rek er Rusi ez eus ouspenn eur ouenn dud. Ha ne gav ket din en defe kement-se lakaet ar "vro vras" da vont da goll, tamm ebet.

— Gant ar Rused, te 'oar, n'eus netra da gompren.

— Ha! E *BRO-ZAOZ* e komprened eun dra bennak? Ma! Du-ze e tesker er skolioù eur yez kar d'ar brezoneg... Ya, va faotr, bez' ez eus, en eur c'horn eus rouantelez Yann-Zaoz, tud hag a lavar : tad, mamm, gwin, bara, kig...

— Kement-se! Biskoaz kement all!

— Hag ar yez-se a vez desket er skolioù, va den mat. Desket er skolioù e Bro-Zaoz!

— Ya, met kals a dud a gomz al langach-se?

— Kals? Tamm muioc'h eget m'eus a Vretoned oc'h implij ar brezoneg. Nemet gwelloc'h e ouzont o yez, pegwir e vez desket dezo er skol... Anaout a rez ar *SUIS*?

— Ya, eur vro e peoc'h abaoe pell'zo!

— Gwir eo. Bro al lêz, ar fourmaj, ar moñchou... Eur vro binvidik. Ha koulskoude e tesker enni peder yez : alamaneg, galleg, italianeg, latineg. Peder yez, pegwir ez eus eno tud a gomz unan pe unan eus ar yezou-ze; peder yez desket er memes bro, ha n'eo ket gwall vras. Ha peoc'h a zo; ha mont a ra mat an traou!

Ha gouzout a rez pet den a gomz al latineg en Alpou?

— ???

— 50.000 hepken! Ha ni a zo eur milion e Breiz! Te gave dit e oa ar brezoneg ar yez vihana!

— Met, bez' ez eus... penaos... verbou, anoïou, e brezoneg?

— Penaos, te, hag a gomz brezoneg bemdez, te 'gav dit e c'hellez kaozeal hep implij nag ano na verb? Poent eo, ya, poent bras eo lakaat ar brezoneg da veza desket er skol!

Kaourintin RIOT.

Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulerez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES



AR C'HI O TOUGENN PRED E VESTR

N'oufemp chom hep sellet ouz ar merc'hed brao,
Nag hep astenn war an aour hor pao.
Nebeud a dud, evit diwall eun teñzor,
o deus awalc'h a imor.

Eur c'hi hag a zouge boued da dud an ti
'veze ouz e c'houzoug staget pred e vistri.
Yun a rae muioc'h eget n'hen dije karet,
pa wele boued mat aozet.

Atao, koulskoude, ni tud kement ma 'z omp,
a zo prest da baka ar madou tost deomp.

Tra souezus! desket 'vez yun d'ar chas yut,
Ha n'heller ket hen deski d'an dud.

Ar c'hi-mañ eta a oa evelse starnet.

Eur c'hi-dog a c'hoanta kaout ar pred.

Ne voe ket ken aes ha ma kave dezan
da genta.

Rak, laket e zamm war an dachenn,

hor c'hi a zigoras an abadenn.

Drailh ha razailh : chas all a deuas;

ar re-mañ da veva a oa boaz

diwar an holl;

n'o doa nemet o ler hag o bleo da goll!

Hor c'hi, o welet eo re verr ganto,

hag emañ ar c'hig o vont ebioù d'e c'hino

a zoñjas sevel e lod. Gant skiant-ki e lavar :

« Paouezomp, aotronez, va zamm din, digatar,
ha deoc'h ar pezh a jomo ».

Dioustu, da genta e kemer eun tamm teo,

ha pep hini d'e dro a grog, dog ha chas all,

gwella ma c'hellent : mat ha fall,

holl o devoa friko,

ha peadra da lipat o mouro.

Me 'wel amañ skeudenn hor bro deomp-ni,
a lez he holl arc'hant da vont gant pep hini.

Ar re a zo karget d'hen diwall

a zo gwasoc'h eget al laeron all.

N'o deus ket ezomm kals amzer

evit skuba berniou paper.

Ar gouizieka a ziskouez d'ar re all

penaos kemeret hep chom da c'hedal.

Ma vez unan oc'h ober ar figus,

ha da gregi diegus,

e klev laret n'eo nemet eun diskiant

oc'h ober an neuz da ziwall an arc'hant.

Ha ken aes e kav ar gentel-ze da zeski

ma vez hep dale ar gwella da gregi.

KI. MEVEL.